

~~366c~~

? 366c

NCD

F-3643.1 / C 403
+ 907-4

HC

C. 403

CHANSON COMPOSET

VAR SUJET EUN DEN YAOUANK AG E VAM AG E BEDER MESTREZ

Er Bloavez Mil Nao C'hant Tri

(Var eun ton nevez)

A boe 'noad a dri bla
Me oa mamet minor
C'hoant a meus da ziskleria
Eul loden deus ma sor.

C'hoant meus da ziskleria
Darn demeus ma bue
P'hini meus tremenet
Bete an de a c'hirie.

Gant a derjen a gredan
A oa marved za zad
Ma mam a chom intanvez
C'hi devoa kalonnad.

Pa chom e intanvez
Gant e seiz krouadur
He c'halon voa feblisset
Gant an displijadur.

Seiz minor chome gant hi
Deus a re yaouanka
Ar c'hossa oa unneg vloa
Me na oan nemet tri bla.

D'ar c'houls e me oa yaouank
Bian em jagkeden
Allas me na ouien ket
Petra ma da dremen.

Deus ar beure pa saven
Me mije kalonnad
Pa deue da sooj din
E oa maro va zad.

Mes va mam leun a gourach
Onces am c'housole
Hi a lare din bemde
Mije eur brago neve.

Gred oa din eur brago
O oa gret gant lien
Evel ma oa ar c'his
Guechall gant ar bevien.

Guisket ma ma brago
Ed a oan da bouremen
Soeet ma blavez inad
D'an oll amezeienn dosta

Bed a ma guennien
Bed a ma avalo
Tout an dud a lare din
A oa drol ma brago.

Hennes oa eur brago
Nan na oa ket gre propr
Un anter demeus e fous
A oa laket arok.

Ar brago se oa gret
Din, gant ma c'hoar kossa
Ne oa ket kemeneres
Ouie ket a dailla.

Mes pa oun deut en noad
Da roula ar iaouankis
Me a ma bet eur brago
Ag a oa deus ar c'his.

Neuze me e bate
Kemerre plijadur
Ma zud mes a oa demeet
Et gant o avantur.

Demeet oa ma dri breur
Demeet ma diou c'hoar
Eur breur al chome gane
Da labourat douar.

Om daou chomomp gant om mam
Da serc'hel e menach
Emesk al labour, ar boan,
An tempas ag an crach.

D'an oad a tri vloac'h-vla
Meus bed eun assidant
A neus beuet ma c'halon
En eur mor a tourmant.

Neuze e meus sonjet
Dont da chanç a vicher
Rac ne oa ket deus ma grad
Chom labourer douar.

Ma sonjet voeaji
A mont quit deus ar guer
O sonjal ober ma fortun
Ebars em ber amzér.

Ne oan ket bet er skol
Ma ket a siskama it
Ag an dræze a re din
Eun tam diazamant,

Prenet ma eur c'haier
Ag eul leurric bian'
Ma disket skriva a len
A c'hanoun va unan.

Raktal en eun instant
A oa deut em spered
Ma e'hajen da voeaji
E tiskjen ar galley.

Ouijen skriva a len
A gout an daou langagh
A gonit ma fortun
Se zo eun avantach.

Va mam pa deus klevet
Hi a lare dime
Petra emei ma buguel
Petra a sonjes te.

Me meus dioered da dad
Savet sez krouadur
Te a c'he ma yaouanka
Te re ma flijadur.

Mar kes er maes ar vro
A dilesel ar guer
Me vo oblijet neuze
Da verza ma mobilier.

A goude kemesse
Da belech'a c'hinme
Vin toled a distolet
D'an eil li d'égule.

Chom ganen tre ma vin beo
Doue roio dit chans
Da ober asteriou mad
Goude an abondans.

Pa meus klevet va mam
Gant e c'homzo agreabl
E strinkas an dero
Demeus va daou lagad.

Me o chans a santimant
O sonjal chom ganti
A goude vije maro
C'hajen da voeaji.

Va mam oa arri koz
Alies vije klanv
Bet a deus eur c'blevet hir
Eunek pe daouzek vloa.

Aben daouzek'via goude
Ma mam deu da vervel
Gras ma mam er barados
Er joasy eternel.

Ma breudeur, ma c'hoarez
Neuze deuas d'ar guer
Da c'houlen o fartach
Demeus ar mobilier.

Guersed oa ar mobilier
Partajet an arc'hant
A pebbini gant e lod
A oa bet goel kontant.

Eur breur al ma er guer
Assambles ganeme
Ag henes oa demeet
Aben eur mis goude.

A me o sonjal neuze,
Pa oan c'hoos pot yaouank
Ma ragen eur marc'hadour
E c'honejen arc'hant.

Bet on marc'hadour fao
Marc'hadour pabioles
A marc'hadour pis glaz
Marc'hadour patates.

Marc'hadour gvalo
A marc'hadour boësson
Anvet oan pot ar gis mad
Bars en ker Lannion.

Anvet oan pot ar gis mad
Bars en ker Lannion
Plassa ren domistiket
En tier a fesson.

Marc'hadour kos dillat
So hanyet flipiri
Onnes so'r vicher vad
Nep a oar anez.

An neb a bren marc'hadour
A goudé guerza ker
Enes rafe e fortun
Ebars en her amzer.

Bet on marc'hadour koat
Marc'hadour plous pe golo
Marc'hadour lunedo
A marc'hadour mōncho.

Marc'hadour tolenco
Kartenn, monaïter

A chansonniò a cerzen
Ia, pa mije amzer.

Marc'hadour bric a brac
So anvet merseri
A pa vije hir an nos
Me a râ komedii
Oeajet meus Bretagn
En ker a var ar mes
Gant ma vilosiped
A ma marc'hadourc.

Vel seton deut aben
Da c'honit ma fortun
En eur lezel a poësson.
Ar merc'het hag ar butun.

An nep-a-neuz-é-c'hempeset
Sø e ano Jean-Louis
A zo gannet e Plestin
Kichen Toul-ar-Hiry.

E ano pen da ben
E Jean-Louis Guyader
A ra e zemerang fix
En paros Tréduder.

Breman e neus choajet
Eur vicher tr vrava
Pa ve skuis o labourad
A chom da ziskuiza.

Ones so eur vicher
Ag am gra disouci
Vank din met eut Varjeann
Kontant da zemezi.

FIN

Peder mestres a meus bet
A oa deus a Dreguer
Mes iaouankic a oant c'hoas
Na Ouient ket o micher.

Iaouankic a oant c'hoas
Ouient ket o micher
C'heink gant losten o c'hivis
Da diskou ar goter.

Un a né so Perrinic
Ag ében Mari-Jeann
Unan al so Mari-Louise
Ag ében Mariann.

Na c'houllan ket diskleria
Piou a c'he reze
Un anhe e meus klèvet
A spisse ne guele.

Ag unan al anheze
A blije din er fad
Ag ones a mije bet
Peneverte e zad.

An diou al a meus klèvet
A blije dè guinardant
Se so kos din c'hon chommet
C'hon chommet pot yaouank.

Propriété réservée.

GUYADER Jean-Louis.

Chanson ar Finistère

C 967-4

VA BRO ALAOURET

Gant ar Bleun Lann ag ar Bleun Balen

HAC AN TOUR DANTELEZET

Var eun ton Galec.

Finistère e zoun bet-gane,
He Castel-Paol eo man va brô;
Ar vrô guëlla a ouffet cavet,
Ha caëra Tour zo tro war dro;
Me o c'harie, me o admire,
Quelies deiz ro Doue, me lavare;
Me gar ma Brô alaouret,
Va Zour dantelezet.

Mes pa oa rentet din ar c'hélond
E zoa ret quittat va mestrez;
Ha mont da heuill an tabourinou,
Dilezel tad ha tieguez,
Me meus changet ha lavaret;
Oh! n'antân qet, n'antân qet, n'antân qet.
Güell eo va Brô alaouret,
Va Zour dantelezet.

Hac e vijen- me en em fachet ?
Senti d'an urz me, a ranqe.
Tud mechant a râ scouarn calet,
Och va daëlou, va c'hlemou-me,
Aac e c'hoarzetz e voa pâet,
O lavaret : Yvonic ? n'antân qet !
Adieu va Brô alaouret,
Va Zour dantelezet.

En despet din-me, ar rejmant,
En exercic, Yvonic paouard a long tra
Nem boa na gout nad ententamant
D'anaout james droite, demi-tour;
Hac e troen evel ma sonjen
Dre ma troën, gant anqen e clasqen
Guelet va Brô alaouret,
Va Zour dantelezet.

Diouc'h ar gamel tam ne brofiten,
Treud, gen a guezen eus va za,
O vont varierc'h ar c'horf me chomme
Bep cant pas d'en em discuiza
Hac e voelen, dre ma sonjen
Marteze qen birviqen ne veljen,
Siouas va Brô alaouret,
Va Zour dantelezet !

D'ar potr m'a n'eus nemet eur remed,
(Eme'n doctor) : eur c'honeje mad ;
Güelit-en.. entrezec'ar vêred
E querz ar c'heas paour timad.
Ha great e voe var ar guer-ze
Dal da gonje qea d'ar guer alesse
Da gaout da Vrô alaouret,
Da Dour dantelezet !

O va brô gueaz l ô brô beniguet !
Celu me distro en hô creiz !!!!
A xeo da vijen miliguet
Ar ge am c'hasfe deus va Breiz !
O va Zad paour ! ô va Mam guez !
O Jantonie, va anter-tiegez !
Gloar d'hor Brô alaouret !
D'ho Tour dantelezet !

Bremàn cetu me em tieguez,
Gant Jantonie, va greguic coant ;
Eur greguic douç leun a vadelez :
A ra pep tra hervez he c'hoant.
Beza hor bugaligou,
A vezoo coantic evel oligou.
O ya Brô Alaouret !
O Tour Dantelezet !

Hac en zo honneur pâr d'am hini ?
Nan m'en assur, a dra certen :
Ne meus mui aoun deus an ennemi,
Ha n'em bezo tanfoultr biqen,
N'eus general na caporal
A ell güelet eveldon-me ractal
Qer caér a va Brô alaouret,
Na Tour dantelezet.

Choui, soudardet va regimant,
Qersit oll d'ar victor atao ;
Pepini en deus o zantimant ;
M'en em gar gant Jantonie brao.
C'houi o redo pell dre bep brô,
Ha me chommo aman bête ar maro,
Gant va Brô alaouret,
Va Zour dantelezet.

Mes ma teufe biqen ar Zaozon
Da attaqui va brô qer Breiz,
Eleal neuze, en güir Breton,
Me en tou aman var va feiz,
Qerqent e ven güir tor'e ben,
Gant va Jantonie, hon daou o tisen
Hor Brô ker alaouret,
Hon Tour dantelezet.

Eun deiz, pa éruo an termen
Ma vezoo ret renta ar gont.
Dirac treid ar Barner Souveren,
Me gred n'em bezo qet a spont :
Me meus bepred an oll caret,
Ha va Jantonie ha me admiret.
Hor Brô caér alaouret,
Hon Tour dantelezet.

FIN.